

QUELENNADUREZ D'AR YUGALE.

Ton : *Conditor alme siderum.....*,
 Pe : *Offromp da Zoue ar sacrific.....*,
 Pe : *En hano en Tad eternal.*

I.

1. 'Vit beza eürus, bugale . .
 Eo ret servicha mad Doue :
 Pell dious Doue ne gaver quen
 Nemet trubuillou hac anquen.

2. Mil guech doussoc'h eguet ar mel
 E zeo lezen an Eternel ;
 Desiraploc'h e zeo memes
 Eguet an aour hac ar perles.

3. Al lezen hac ar Brofetet
 En daou c'her mân zo comprenet :
 « Carit ho Toue dreist peb tra,
 » Carit eveldoc'h ho nessa. »

4. Eürus, a lavar eur Profed,
 An hini a gommanç abred
 Da zérvicha, gant carante,
 Roue an douar hac an eê.

5. Bemdez e cresquo en furnes
 En vertu hac en santeles,
 'Vel ma cresq eur fourdilisen
 Var bord an dour, en eun draouyen.

6. An oll deïou eus ho pue
 A zo roët dec'h gant Doue,
 'Vit ma teuffot d'ho c'honsacri
 D'er servicha ha d'er meuli.

7. Commancit 'ta, eus a vremân,
D'ho implija oll evitân;
Ha quendalc'hit, bete'r maro,
D'er c'haret muioc'h mui ato.

8. Guelloc'h e eun devez heb quen
En servich hon Mestr Souveren,
Eguet mil devez tremened
En creis plijaduriou ar bed.

9. Ar furra eus ar rouane
A lavar demp en guirione :
« Peb tra er bed-mân a zo vên,
» Nemet servich Doue heb quen. »

10. « Petra dal, eme hor Zalver,
» D'an den gounit ar bed antier : »
Mar coll-he ene, an den paour,
Petra raïo gant eur bern aour?

11. Eur guir zervicher da Zoue
'Zo eürussoc'h 'vit eur roue :
Possedi 'ra peoc'h ar galon,
Sourcen eus ar bonheur guirion.

12. Mar marv e carante Doue
E squeudo 'vel an heul en eê,
E lec'h ma rêno da james
Gant ar Zænt hac an Æles.

II.

13. N'ho pezet birviquen avi
Ous eürusted an dud impi :
Encres, remors ha disesper
A zo e calon ar pec'her.

14. Renoncit crenn d'an drouc-speret,
D'all luxur ha d'all leoudouet,

D'ar vesventi ha d'an dansou,
Dorojou bras an iferniou.

15. Mil guech guell e ve dec'h mervel
'Vit coueza er pec'het marvel :
Tec'hit eta dioutan bepret
'Vel dious eur sarpant fuloret.

16. Dious ar goal gompagunezou
Tec'hit bepret, bugaligou ;
Rac an neb a c'heuil anézé
A vez buan collet gante.

17. D'ar gueliou bers ha d'ar suliou,
Assistit en oll offiçou,
Gant devotion ha gant fe,
'Vel guir vugale da Zoue.

18. It alies enpad ar bla
Da goves, da gommunia,
Gant guir dispositionou,
Evit gonit gloar an eëvou.

19. Conservit mad, en ho c'hene,
Graç Doue hac he garante,
Hac, evit n'ho c'holfot james
Pedit ha beillit heb paouës.

20. Dre oll emâ Doue presant :
Sonjit ennan da beb instant,
Ha souden e viot parfet
Ha bepret trec'h d'an drouc-speret.

21. Evit plijout d'he vajeste,
Offrit alies da Zoue
Quement a rit, a andurit,
A songit hac a lavarit.

22. Bezit ato devot meurbet
D'ar Verc'hes, hor Mam benniguet ;

Rac guir zervicherien Mari
A vezo oll zalvet dreizi.

23. Heuillit' ta he breuriezou
Hac imitit he vertuziou;
Ha peb graç dec'h a obteno,
Bremân ha da heur ho maro.

24. Pedit, gant guir devotion,
Hoc'h Æl Mad hac ho Sant Patron
Da veilla varnoc'h, deiz ha nos,
Ha d'obten dec'h ar Barados.

III.

25. Evit magua ho c'heneou
Hac avanç guell er vertuziou,
Grit bemde gant attantion
Eul lectur a zevotion.

26. Mæs diouallit mad, me ho ped,
Na lenfac'h netra fall ebet;
Rac, sioas! ar goal lecturiou
A ampoëzon ar c'halonou.

27. Ar c'hroasiou hac ar baourte
A zo ar guir hent eus an cê :
Douguit ho croas varlerc'h Jesus
Evit mont d'he c'hloar dudius.

28. Dre eur burzud a garante,
Hor Zalver a chom, nos ha de,
Da repos en tabernaclou,
Evit selaou hor pedennou.

29. Hor guervel a ra gant douçder
Dre ar c'homzou mân quen tener :
« Deut d'am c'haout oll dud afflijet;
» Guenèn e viot soulajet. »

CANTIC
Var an Hano Santel a Vari.

Approuvet gant an Autrou Jh-M. GRAVERAN, Escop a Guemper.

Ton : *Jesu, dulcis memoria...*

1. Mari! hano douç d'ar guinou,
 Mari, guir joa ar c'halonou,
 Goude an hano a Jesus
 N'en deus hano quen d'udius.

2. Mari, templ an Dreindet Santel
 Ha guir Vam ar Verb Eternel,
 Bezit ivez hor mam dener
 Ha n'ancouait quet hon miser.

3. Mari, c'houi a zo Rouanes
 An dud, ar zænt hac an æles,
 Hac advocades galloudus
 Ar bec'herien dirac Jesus.

4. Ho c'hano zantel, ô Guerc'hes!
 Hor c'harg a laouënidigues
 Hac a ra consolation
 Ar re zo en affliction.

5. Nan, den na ouffe lavaret
 Ar graçou o c'heus obtenet
 D'ar re o deveus, gant fizianç,
 Goulennet dreisoc'h asistanç.

6. Mari, fourdilizen squeudus
Hac eus eur c'hues délicius,
Ho quenet hac ho purete
A chalm an douar hac an eê.

7. Mari, douçder ar c'halonou
Ha sclærigen ar sperejou,
C'houi zo eur zourcen abundant
A joa hac a gontantamant.

8. Pa selaouit hor pedennou
E consolit hon eneou,
Ha neuze Jesus a glascomp
Ha traou ar bed a zisprijomp.

9. Sonjomp oll e Mari bemdez
Hac imitomp he c'harantez,
He furete, he modesti;
Evit dont guell d'he c'henori.

10. Enoromp oll hon Rouanes,
En eur veva er zanteles.
Pedomp hi gant devotion
Da rên bepret en hor c'halon.

11. Mari, sourcen a zeliçou,
Ha squer eus an oll vertuziou,
Rênit varnomp oll, mam dener,
Hac hirio, hac en peb amser.

12. Ni gano ho meuleudiou
Hac a c'heulio ho c'hexemplou,
'Vit mont guenec'h, goude'r maro,
Da veuli Doue d'hor guir vro.

Evel-se bezet gret.

Pedennou da Vari, concevet hep pec'het.

O Mari, concevet hep pec'het, pedit evidomp-ni pere hon eus recours dec'h.

Santes Mari, refuch ar bec'heriën, pedit evidomp.
Calon pur a Vari, pedit evidomp.

Peden Sant Bernard da Vam Doue.

Ho peset sonch, ô Guerc'hes meurbet trugarezus! penaus n'en deus biscoas clevet den ebet o lavaret ho pije dilezet nicun eus ar re o deus bet recours d'ho protection, imploret ho sicour ha goulennet ho c'has-sistanç. Leun ivez eus ar memes fizianç, ô Guerc'hes, Mam ar guerc'heset, en em hastan da zont d'ho caout; hac en eur hirvoudi dindan ar bouës eus va fec'hejou, en em strincan d'ho treid. Me ho suppli, ô Mam ar Verb divin, na zisprijit quet va feden; mes plijet gue-nec'h he selaou hac obten din ar pez a c'houlennan.

Evel-se bezet gret.

Hon Tad santel ar Pab Pius IX, en deus accordet tri c'hant devez Induljanç d'ar re a lavaro ar beden-ze, quen lies guech ma er lavarint gant devotion; hac eun Induljanç plenier bep mis d'ar re e lavaro bemdez.

Dre ar beden-ze, lavaret gant fervor, ha gant ar vrasa fizianz en galloud ha madeles ar Verc'hes, e zeus erruet traou burzudos. Disquit-hi dre an évor ha lavarit-hi bemdez.

**Peden d'ar Verc'hes evit goulen ar burete
a gorf hac a ene.**

Per sanctissimam Virginitatem et immaculatam Con-ceptionem, purissima Virgo, emunda cor meum et carnem meam. In nomine Patris, et Filii, et Spiritus sancti. Amen.

Peden gaër da Jesus crucifiet, gant Induljanç plenier (*).

O Jesus, douç ha mad meurbet ! prosternet humblamant d'an daoulin en ho presanç, me ho ped hac ho suppli gant ar oll fervor eus va ene, da imprima em c'haion santimançhou crèn a Fe, a Esperanç hac a Garantez; eur guir glac'har d'am fec'hejou hac eur volonteز ferm d'en em gorrija anezo. En pad ma consideran ha ma contemplan ho pemp gouli sacr, gant ar garantez an tenerra hac ar glac'har ar brassa, e teu em speret ar c'homsou prononcet en avanç gant ar roue santel David : *Toulet ho deus va daouarn ha va zreid, niveret ha contet ho deus va oll esquern.*

Peden d'hor Salver Jesus-Christ, pehini a d'effet da lavaret alies, mæs ispecial goude ar Communion.

Ene infniman santel eus a Jesus-Christ, santifit ac'hanon.

Calon sacr eus a Jesus-Christ, enflammit ac'hanon.

Corf adorabl eus a Jesus-Christ, sauvetaït ac'hanon.

Goad precius eus va Zalver, carguit va ene eus eur joa zantel.

Dour pur sortiet eus a gostez Jesus, guelec'hit a c'hanon.

(*) An Tad santel ar Pab Pius seizvet eus an hano, dre eun decret eus an dec a vis Ebrel 1821, en deus accordet evit bepret eun Induljanç plenier, pehini a ell beza appliquet d'an eneo eus ar purgator, evel m'ho devoa a ziaroc accordet Clemens VIII ha Beneat XIV, d'an oll dud fidel pere, o veza covesseet ho fec'hejou, gant eur guir glac'har, ha recevet dignamant ar gommunion santel ha lavaro devotamant, dirac eur grucifi, ar beden a zé aman diarog.